




ZON AR BUTUNER




Gwel - lan lou-zou war an dou-ar Eo ar bu-tun da



beb gla 'char, La di - rei tra - la. Dou - e hen ha-daz



a gre-dan La di-rei, la di - rei Gou - de pec'hed hon



tad kentan La di - rei tra - la.

Gwellan louzou war an douar
 Eo ar butun da beb glac'har
 La direi, tra la ;
 Doue hen hadaz, a gredan.
 La direi, la direi,
 Goude pec'hed hon tad kentan,
 La direi, tra la.

'Vel keuned sec'h sklapet er forn,
Da heuilh mogeden c'hlaz ma c'horn,
 La direi, tra la ;
Trubuilh, dienez, disesper
 La direi, la direi,
'Ya da netra en berr amzer
 La direi, tra la.

Poslech ha loagr eo ma gwreg,
'Vel kroc'hen touilh eo rust he beg,
 La direi, tra la ;
He diouc'hroazel a zo rampet,
 La direi, la direi,
N'oufec'h kavout falloc'h struzet
 La direi, tra la.

'C'hanta! 'dal ve tanet ma c'horn,
'Gavan ken 'sell Janed a gorn,
 La direi, tra la ;
'Vel eur rozen 'teu flour ha koant,
 La direi, la direi,
Ha penn-da-benn 've diouz ma c'hoant,
 La direi, tra la.

Pe c'harm, pe vlêj ma bugale,
Ken ve eun drouz ifern gante,
 La direi, tra la,
Prim, eun tamm butun 'n em c'horn pri,
 La direi, la direi.
Hag e tremen ma bar-zodi,
 La direi, tra la.

Da bep pred patatez ha yod,
Gwir geusteuren eur parpailhod !
 La direi, tra la ;

Ba ! eur c'hornedad goude-ze,
 La direi, la direi,
Chetu me groet eur pred roue.
 La direi, tra la.

War ma chouk 'neus nemet druilh,
A-dammo eman ma brago,
 La direi, tra la ; .
'C'hanta ! gand ma c'horn 'n em godel,
 La direi, la direi,
Me gav 'meus mado a-grugel,
 La direi, tra la.

Mez sadorni ra ma butun... ?
O neuze 'vad, tân ha kurun !
 La direi, tra la ;
Foeltr ha kounnar ve war ma zro.
 La direi, la direi,
Daoust da Janed ha d'he daero,
 La direi, tra la. . . .

'Vit gout ma venn maro da-vad,
'Po 'met tanan d'in eur c'hornad,
 La direi, tra la ;
Mar n'am gwelet ket o tridal,
 La direi, la direi,
D'ar vered ma c'haset raktal,
 La direi, tra la.

Mez 'rok ma loskel er poull don,
Laket ma c'horn war ma c'halon,
 La direi, tra la.
Gantan ma zammik relego,
 La direi, la direi,
Heb diezan a boultrenno,
 La direi, tra la.

Da c'hortoz monet en nenvo,
Gand butunerien koz ma bro,
 La direi, tra la ;
'Lec'h karo Doue hon lezel,
 La direi, la direi,
Da danan 'wecho hon c'herniel,
 La direi, tra la !

Gab LISKILDRY.

